

Spécimen des
chansons avec airs
(3) page 1 verso!

373

PEDEN

Leanez Breiz-Izel o vont da Vro-Gymru.

WAR DON :

Eur prins yaouank an deuz d'in lacaret pe Gouel sant Deci, gant DIR-NA-DOR.



O de a joa ! O de a love-ne ! Breiz ha Gymru u-nanet a ne-



ve ; Breiz ha Gymru, Breiz ha Gymru u-nanet a ne-ve

D'ec'h-c'hwi em euz, da vad ha da viken,
O va Jezuz ! en em westlet a-gren.

O va Jezuz !

O va Jezuz !

En em westlet a-gren.

Evit hoc'h heuilh em euz nac'het ar bed ;
Lec'h am galvit e luskan da vonet.

Lec'h am galvit,

Lec'h am galvit

E luskan da vonet.

War-zu Cymru e tiskouezit an hent,
War-zu mam-Vro hon tadou hag hor sent.

War-zu mam-Vro,

War-zu mam-Vro

Hon tadou hag hor sent.

Mam-Vro sant Paol, sant Iitud, sant Hernin.
Mam-Vro Brick, Tugdual, Kaourintin.

Mam-Vro Brick,

Mam-Vro Brick,

Tugdual, Kaourintin.

Dreuz d'ar pellder e sked stered an noz,
Ha sent hor Bro a-dreuz d'an amzer goz.

Ha sent hor Bro,

Ha sent hor Bro

A-dreuz d'an amzer goz !

M'ho ped, sent koz, c'hwi dreist-holl sant Devi,
Plijet ganec'h hor bleina da Gymru.

Plijet ganec'h,
Plijet ganec'h
Hor bleina da Gymru !

Breman, Jezuz, evel d'an ebestel,
O reit d'emp-ni gras ho Spered-Santel !

O reit d'emp-ni,
O reit d'emp-ni
Gras ho Spered-Santel !

Evit ma vo entanet hor c'halon
Gant zel hor sent pa dreizjont ar mor don,

Gant zel hor zent,
Gant zel hor zent
Pa dreizjont ar mor don.

'Vit ma hellimp, kent digouezout er vro,
Diski ervad yez santel ar C'hymro.

Diski ervad,
Diski ervad
Yez santel ar C'hymro.

Yez ar varzed a gân war o zelen :
Mouez an ene o skiltra er c'herden (1).

Mouez an ene,
Mouez an ene
O skiltra er c'herden.

Yez sant Gweltaz, sant Herve, sant Kado (2),
A skoe don ho Ker er sperejo.

A skoe don,
A skoe don
Ho Ker er sperejo.

O ! ra 'z aimp oll, Jezuz, gant ho pennoz,
D'he c'homz ganto, eun deiz, er baradoz !

D'he c'homz ganto,
D'he c'homz ganto,
Eun deiz, er baradoz !

ABHERVE.

(1) *Llais y enaid ar ei thanau*, « mouez an ene war he c'herden » a lavare ar varzed koz en eur gomz eus an delen a dalveze d'ezo da eila o c'hân, evit merka e oa andon o ratoz e deun o ene.

(2) Ar re-man o deuz pouezet ar muia, dre o c'homz pe o skrijou, war spered hon tadou koz. Sant Kado, leshanvet *y doeth*, da laret eo « ar fur, » a oa brudet dreist-holl evit e genteliou displeget gantan, dioc'h giz an drouized hag ar varzed gwechall, e furn lavariou pe sturion lemm hag eaz da ziski. *Peden sant Kado* a vez lavaret pep bloaz, e Cymru, dirag ar bobl, pa zigorer ar « Gorsedd » pe Breujou ar varzed.